

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù – Gavotenn Goueled Leon

Nag en tu all d'ar barrez

1. Farli farla o bim bam-bom/ Alo farlarideno
2. Ge tronla traladira
3. Lanti goudig dondaine, lanti goudig donde

Nag en tu all d'ar barrez
Ez eus ur plac'h yaouank

Hag he deus tri amourous
Me 'oar he zantimant

Ar c'hentañ 'zo keginer
An eil 'zo paotr a gambr

An trede a zo kere
Kere botaouer-ler

Hag eñ deus graet ur botoù
Demeus ul lêr lijer

Ha pa 'oa graet ar botoù
D'o c'has d'ar gêr oa aet

En eur esaeñ ar botoù
Dezhi 'deus lavaret :

"O me 'garje, koantennig,
Bez' ganez dimezet".